

KATEKIZ

AR VUGALE VIHAN

EVIT

Eskopti Kemper ha Leon.



Priz : 4 guennek.

KEMPER

MOULLET E TI ARSÈNE DE KERANGAL

MOULLER AN ESKOPTI

1911

FB
268.
082
CAT

543


KATEKIZ

AR VUGALE VIHAN

EVIT

Eskopti Kemper ha Leon.

268
072
C47



KEMPER
MOULLET E TI ARSÈNE DE KERANGAL
MOULLER AN ESKOPTI

1911

Klevit mad

Ar **C'hatekiz**-man a zo bet great gant Aotrou 'n Eskob Guened hen deuz roet aotre deomp da voulla anezan ive d'Hon Eskobti.

Evit ar vugale vihan eo bet skrivet.

Pedi reomp ar famillou hag an dud karget d'ober katekiz da daoler evez mad var ar c'huzuliou-man roet gant Eskob Guened hag a zo talvouduz ive evit eskopti Kemper.

Al levrik-man n'eo ket da veza desket dioc'htu ger evit ger. Araok lakaat hen deski, ar gerent hag ar re a ra katekiz a dle displega a vouez huel an oll guirionesiou a zo ennan. P'o devezo ar vugale komprenet ar guirionesiou-ze, e vezo great dezo o deski a zindan evor.

Er C'hatekiz-man n'euz ket bet c'hoant lakaat ar relijion a-bez, mez merka an traou ken freaz ha m'eo possubl. Meur a c'her a zo n'int ket freaz avoalc'h ; lezet eo bet evelato ar geriou-ze abalamour e vez klevet hano anezo er prezegennou, er pedennou. Ne vezo nemed diskuez sklear d'ar vugale ar guirionesiou a zo dindan ar geriou-ze hag e c'hellint eaz o entent.


O teski ar C'hatekiz-man, ar gerent a zalc'ho sonj e vank ennan kalz traou hag e zaffent a eneb o dever ma ne zeskfent ket divezatoc'h ar C'hatekiz braz d'o bugale.

Ra vezo gullet ar gerent oc'h en em rei d'al labour zantel-man gant kement a aked hag e veze great guechall, hag o kemet plijadur o teski o unan o relijion. Netra guelloc'h evit dalc'her stard d'ar feiz ha dont da veza krenv ha gwest da viret o deveriou a gristen.

Kemper, 21 Kerzu 1910.

† ADOLPH,

Eskob Kemper ha Leon.



PEDEN AR BUGEL KRISTEN

En hano an Tad, ar Mab, hag ar Spered-Santel. Evelse bezet great.

AR BATER

Hon Tad, pehini zo en Nenv, hoc'h hano bezet santifiet, ho rouantelez deuet deomp ; ho polontez bezet great var an douar evel en Nenv. Roit deomp hirio hor bara pemdeziek, ha pardounit deomp hon offansou evel ma pardounomp d'ar re o deuz hon offanset ; ha na bermetit ket e kouezfemp e tentasion ; mez hon dilivrit diouz an drouk. Evelse bezet great.

AN AVE MARIA

Me ho salud, Mari, leun a c'hras, an Aotrou Doue a zo ganeoc'h, benniget oc'h dreist an holl gragez, ha benniget eo ar frouez euz ho korf, Jezuz.

Santez Mari, mamm da Zoue, pedit evidomp pec'herien breman hag en heur euz hor maro. Evelse bezet great.

AR GREDO

Me gred e Doue an Tad oll-c'halloudek, krouer an Nenv hag an douar ; hag e Jesus-Krist e Vab unik hon Aotrou ; a zo bet konsevet euz ar Spered-Santel, ganet gant ar Verc'hez Vari ; hen deuz gouzanvet dindan Pons-Pilat, a zo bet krusifiet, maro ha sebeliet ; a zo diskennet d'an iferniou, ha ressusitet an trede deiz euz a varo da veo ; a zo pignet en Nenvou, hag azezet en tu deou da Zoue, an Tad oll-c'halloudek ; ac'hano e teui da varn ar re veo hag ar re varo ; me gred er Spered-Santel ; an Iliz santel katolik ; kommunion ar Zent ; remission ar pec'hejou ; resurreksion ar c'hig ; ar vuez eternal. Evelse bezet great.

AR GONFITEOR

Me govez ouz Doue oll-c'halloudek, ouz ar Verc'hez Gloriuz Vari, ouz an Aotrou sant Mikeal arc'hel, ouz an Aotrou sant Ian-Vadezour, ouz an ebestel sant Per ha sant Paol, hag ouz an oll Zent, abalamour m'am euz pec'het braz dre zonz, dre gomz, dre ober, dre va faot, dre va faot, dre va brasa faot ; rak-se e pedan ar Verc'hez Gloriuz Vari, an Aotrou sant Mikeal Arc'hel, sant Ian-Vadezour, an ebestel sant Per ha sant Paol, hag an oll Zent da bedi Doue evidoun. Evelse bezet great.

GOURC'HEMENNOU DOUE

Giz Leon.

1. Eun Doue ebken a adori — ha dreist peb tra oll a giri.
2. E vean he hano na doui ket, — nag ive netra all ebet.
3. Ar zuliou santel a viri — e servich Doue, oc'h he veuli.
4. Da dad, da vam a enori, — evit pell amzer ma vevi.
5. Diouall na lazi den ebet, — nag a zezir, nag a effet.
6. Lubrik ne vezi ket ivez, — nag a gorf, nag a volonte.

7. Laerez na miret madou den — gant gouiziegez na ri biken.
8. A eneb den falz testeni — na gaou ebet na liviri.
9. Na c'hoanta dre luksur pec'hi, — nag e sonj vil n'ez em lezi.
10. Na souhet madou da hentez, — evit o c'haout dre falsentez.

GOURC'HEMENNOU AN ILIZ

Giz Leon.

1. Ar goueliou berz a zantifi, — neuze peb labour a lezi.
2. Ha klevo devot ha penn-da-benn, — sul gouel berz an offerenn.
3. Eur vech er bloaz da vihana — e kovesai eb nac'h netra.
4. Ha da Grouer a resevi, — da Bask devota ma c'helli.
5. Iun a ri an Daouzek-Deiziou, — ar c'horaiz hag ar vijilou.
6. Kig, nemed da zeiz Nedelek, — guener na *sadorn* na zebri ket.

GOURC'HEMENNOU DOUE

Giz Kerne.

1. Eun Doue ebken a adori — ha dreist peb tra oll a gari.
2. Eb kaoz he hano na doui ket, — nag ive netra all ebet.
3. Miret a ri an oll zuliou — gant euvrou mad ha pedennou.
4. Da dad, da vam a enori, — ha da vuez a astenni.
5. Ha mir na lazi den ebet, — nag a galon, nag a effet.
6. Lubrik mir na vezi nepred, — dindan boan da veza daonet.
7. En em ziuall diouz laeronsi, — na dommach da hentez na ri.
8. Na geier na falz testeni — mir birviken na liviri.
9. Na c'hoanta dre luksur pec'hi, — nag e sonj vil n'en em bliji.
10. Madou ar re all na zezir ket — evit o c'haout eb guir ebet.

GOURC'HEMENNOU AN ILIZ

Giz Kerne.

1. Kleo devot a benn da benn — bep sul, bep gouel an offeren.
2. Neuze peb labour a lezi — evit da Zalver enori.
3. Kovez a ri da vihana, — eur vech er bloaz eb nac'h netra.

4. Ha da Bask, e sakramanti, — rak-se e stad vad e vevi.
5. Iun a ri an daouzek deizioù, — ar c'horaiz hag ar vijilou.
6. Na da *zadorn*, na da vener — ne zebri kig e neb amzer.

GOURC'HEMENNOU DOUE

Giz Treger.

1. Eun Doue ebken a adori — ha dreist peb tra oll a giri.
2. Doue en ven na doui ket, — na netra all dem euz ar bed.
3. Ar zuliou santel a viri — evit Doue ma zervichi.
4. Da dad, da vam a enori — evit pell amzer ma vevi.
5. Muntrer na vi e nep feson — nag a effet, nag a galon.
6. Dioual ouz al lubrisite — nag a gorf, nag a ene.
7. Dommach ebet da zen na ri, — mar ac'h euz great, hast rapari.
8. Gevier na nep falz testeni — mir birviken na liviri.
9. Na c'hoanta dre luksur pec'hi, — nag en sonj vil n'en em bliji.
10. Madou re all na zezir ket — d'o c'hemeret eb lealded.

GOURC'HEMENNOU AN ILIZ

Giz Treger.

1. Kleo devotamant penn da benn — bep sul, bep goel an offerenn.
2. Santifia ri ar goeliou, — var o hed, evel ar zuliou.
3. Kovez da bec'hejou eb mez, — da vihana bep vla eur vech.
4. Korf da Zalver a resevi, — en amzer Bask eb differi.
5. Iun a ri an daouzek deiou, — ar c'horaiz hag ar vijilou.
6. Da voener kig na zebri ket — nag ivez da *zadorn* nepred.

AKT A FEIZ

Va Doue, me a gred stard kement tra hoc'h euz diskleriet hag a ordren d'inn an Iliz da gredi, abalamour ma zoc'h ar virionez memez, ha na c'hellit na fazia hoc'h-unan nag hon lakaat da fazia.

AKT A ESPERANZ

Va Doue, me a esper digant ho madelez ha dre veritou Jesus-Krist, va Zalver, ho krasou er bed-ma hag ar baradoz er bed all, abalamour m'hoc'h euz lavaret o rojaç'h d'inn ha ma talc'hit ato d'ho ker.

AKT A GARANTEZ

Va Doue, me ho kar a greiz va c'haloun ha dreist kement tra a zo, abalamour ma zoc'h infinimant mad hag infinimant din da veza karet; me gar ive va nessa eveldon va unan abalamour deoc'h.

AKT A GONTRISION

Va Doue, eur c'heuz braz am euz d'ho peza offanset abalamour ma zoc'h infinimant mad, infinimant din da veza karet ha ma tisplij deoc'h ar pec'hed. Ho pedi a ran d'am pardouni dre veritou Jesus-Krist, ha me lavar deoc'h, euz a greiz va c'haloun, n'hoc'h offansin mui gant sikour ho kras, hag e rinn pinijen.



PEDENNOU STAG OUTO INDULJANSOU

EVIT ENORI SAKRAMANT AN AOTER

Meuleudi ha bennoz e peb amzer d'ar Zakramant santel hag adorabl euz an Aoter !

EVIT ENORI AR VERC'HEZ VARI

O Mari konsevet eb pec'hed, ni c'houlenn ho sikour, pedit evidomp !

Ho pezit sonj, o Gwerc'hez Vari, leun a drugarez, ne zeuz bet morse klevet lavaret e vije bet dilezet ganeoc'h an hini hen divije en em lakeat dindan ho skæazel, goulennet ho sikour, en em erbedet ouzoc'h. Me ive, leun a fizianz, a deu dave-doc'h, o Rouanez ar gwerc'hez, o va Mam, me red d'Ho kaout, ouzoc'h ec'h en em erbedan, pec'her paour ma z'oun ; o Mari, Mam Jesus, na zisprijit ket va fedennou, mez selaouit anezo gant truez ha bezit ar vadelez da rei d'inn va goulenn !

EVIT ENORI AN EAL GARDIAN

Eal Doue, va eal mad, roit d'in harp ha sklerijen, bleinit hag hentchit ac'hanoun !

Pe c'hoaz :

O va Eal mad, kannad Doue,
Mirit va c'horf ha va ene,
Va mirit diouz an droug-spered,
Va diouallit diouz peb pec'hed.

PETRA RA AR BUGEL DEVOT

PA ZIHUN :

Va Doue, me ro deoc'h va c'haloun, va diouallit hirio diouz pep pec'hed !

ARAOK AR PRED :

Benniget ra vezomp gant dorn Jesus-Krist, ni hag ar pred a zeomp da gemer !

En hano an Tad, hag ar Mab hag ar Spered-Santel. Evelse bezet great !

GOUDE AR PRED :

Ni ho trugareka evit hoc'h oll madoberou, Mestr oll c'hal-loudek, a zo, a zo bet hag a vezo da viken. Evelse bezet great !

ARAOK AL LABOUR :

Va Doue, me ginnig deoc'h va labour ; bennigit anezan !

ARAOK MONT DA GOUSKET :

Va Doue, me ro deoc'h va c'haloun, bennigit va nozvez, evit ma c'hellin ho servicha gwelloc'h varc'hoaz !

KATEKIZ AR VUGALE VIHAN



KENTA KENTEL DOUE

*Piou hen deuz 'krouet
ar bed ?*

1. Doue eo hen deuz krouet 'ar bed
ha kement tra zo ennan.

*Doue hag hen zo] bet
krouet ?*

2. Doue n'eo ket bet krouet.

*Doue hag hen a zo bet
a oll-viskoaz ?*

3. Doue zo bet a oll-viskoaz.

*Doue hag hen a vezo
ato ?*

4. Doue a vezo ato.

*Doue hag hen a vel, hag
hen a anavez peb tra ?*

5. Doue a vel hag a anavez peb tra,
zoken ar zonjou euz hor spered.

— 11 —

*Doue, hag hen a zo oll-
c'halloudek ?*

6. Doue a zo oll-c'halloudek : ober
a c'hell ar pezh a gar.

Doue hag hen a zo mad ?

7. Doue a zo mad, leun eo a garan-
tez evit he oll grouadurien.

*Ha 'gulet a c'hellomp-
ni Doue ?*

8. Ne c'hellomp ket gulet Doue, rak
n'hen deuz ket a gorf.

*Ha gulet a raimp Doue
eun deiz ?*

9. Gulet a raimp Doue pa vezimp
er Baradoz.

Petra eo Doue ?

10. Doue eo an **Hini hen deuz
krouet peb tra hag a zo mestr
var hep tra.**



EIL KENTEL

AN DREINDED SAKR

- Ped Doue zo ?* 1. Ne zeuz nemed eun Doue, ebken.
- Ped Person zo e Doue ?* 2. **Tri Ferson zo e Doue.**
- Pere eo an tri Ferzon-ze ?* 3. An Tad, ar Mab, ar Spered-Santel.
- Neuze e zeuz tri Doue ?* 4. Nan, an tri Ferson zo e Doue ne reont nemed eun Doue ebken.
- Ha kompren a c'hellomp-ni an dra-ze ?* 5. Ne c'hellomp ket kompren penaoz an tri Ferson ne reont nemed eun Doue ebken.
- Neuze e zeuz traou roet deomp da gredi gant Doue ha ne c'hellomp ket kompren ?* 6. Bez e zeuz traou roet deomp da gredi gant Doue ha ne c'hellomp ket kompren.
- Perak e lavar Doue deomp kredi traou ne gomprenomp ket ; Doue a anavez hag a gompren anezo.* 7. Doue a lavar deomp kredi traou ne gomprenomp ket ; Doue a anavez hag a gompren anezo.
- Penaoz ec'h hanver an traou a gompren Doue ha ne c'hellomp ket kompren ?* 8. An traou a gompren Doue ha ne gomprenomp ket a zo hanvet **misteriou.**
- Petra eo mister an Dreinded ?* 9. **Eun Doue e tri Ferson, an Tad, ar Mab, ar Spered-Santel.**

Petra zigas da sonj euz ar mister-ze ?

10. Ar c'homzou a lavaromp oc'h ober sin ar groaz. En hano an Tad, hag ar Mab, hag ar Spered-Santel. Evelse bezet great.



TREDE KENTEL

KROUADURIEN DOUE

- Pere eo kaera krouadurien Doue ?* 1. Kaera krouadurien Doue eo an **Elez** en Nenv hag an **dud** var an douar.
- Daoust hag an Elez oll a zo Elez mad ?* 2. Bez e zeuz Elez mad hag Elez fall.
- Pere eo an Elez fall ?* 3. An Elez fall eo ar re o deuz dizen-tet ouz Doue.

*E pe leac'h e man an
Elez fall ?*

4. An Elez fall a zo en Ifern.

Penaoz int hanvet ?

5. An Elez fall a zo hanvet an drouk-
sperejou, an diaoulou.

*E pe leac'h e man an
Elez mad ?*

6. An Elez mad a zo en Nenv gant
Doue.

*An Elez mad hag hi a
daol evez varnomp ?*

7. Peb den hen deuz **eun eal mad**
karget da daoler evez varnan ha d'hen
diouall.

*Petra dleomp da ober
evit hon Eal mad ?*

8. Ni a dle sonjal en hon Eal mad
ha pedi anezan d'hon difen.



PEDERVED KENTEL

KROUADURIEN DOUE (kendalc'h)

*Pe hano o doa an den
hag ar vaouez kenta ?*

1. An den hag ar vaouez kenta a oue
Adam hag Eva.

*E pe stad e ouent krouet
gant Doue ?*

2. Doue a grouaz Adam hag Eva
santel hag eüruz.

*Adam hag Eva ha cho-
met int er stad-ze ?*

3. Adam hag Eva a gollaz o zantelez
hag o eüruzted o tizenti ouz Doue.

*Dizentidigez Adam hag
Eva hag hi a zo bet
noazuz deomp ?*

4. Abalamour d'o dizentidigez e teu-
omp er bed e stad a bec'hed.

*Penaoz ec'h hanver ar
stad-se ?*

5. Ar stad-se **eo ar pec'hed ori-
ginel.**

*Ha danjer a zo er stad-
se ?*

6. Ar re a varv er stad-se ne zeont
ket d'ar Baradoz.

*Ha lezet omp bet gant
Doue er stad-se ?*

7. Nan, Doue hen deuz bet truez
ouzomp hag hen deuz digaset deomp
eur Zalver evit digeri deomp ar Bara-
doz.



PEMVED KENTEL

JESUS-KRIST

*Piou 'eo ar Zalver di-
gaset d'an dud ?*

1. Ar Zalver zo bet digaset d'an dud
eo an eil Ferson euz an Dreinded, **Mab
Doue.**

*Neuze Mab Doue a zo
deuet var an douar ?*

2. Mab Doue zo deuet var an douar.

Penaoz eo deuet Mab Doue var an douar ?

3. Evit dont var an douar, Mab Doue hen deuz en em c'hreat den.

Penaoz hen deuz Mab Doue en em c'hreat den ?

4. Mab Doue en deuz en em c'hreat den o kemeret eur c'horf hag eun ene eveldomp-ni.

Pe hano hen deuz c'hoaz Mab Doue ?


5. Mab Doue, deuet var an douar, a zo hanyet ive **Jesus-Krist**.

Petra eo Jesus-Krist ?

6. Jesus-Krist a zo Mab Doue en em c'hreat den.

Petra eo mister an Inkarnasion ?

7. **Mister an Inkarnasion eo Mab Doue en em c'hreat den.**



C'HOUEC'HVED KENTEL

BUEZ JESUS-KRIST

Piou a zo mam da Jesus-Krist ?

1. Jesus-Krist hen deus bet eur vam, ar vam-se eo **ar Verc'hez glorius Vari**.

E pe leac'h eo ganet Jesus-Krist ?

2. Jesus-Krist a zo ganet e **Beth-leem**, en eur c'hraou dister, da zeiz **Nedelek**.

Jesus-Krist a zo bet ive eur bugel bihan ?

3. Jesus-Krist a zo bet ive eur bugel bihan evel peb hini ac'hanomp, abalamour da ze e vez galvet ar Mabig Jesus.

Pegeit eo bet Jesus-Krist var an douar ?

4. Jesus-Krist a zo bet tri bloaz ha tregont var an douar.

E pe leac'h hen deuz bevet Jesus-Krist ?

5. Beteg he dregont vloaz Jesus-Krist hen deuz bevet e **ti sant Joseph**, pried ar Verc'hez Vari.

Petra hen deuz great Jesus-Krist var an douar beteg he dregont vloaz ?

6. Jesus-Krist hen deuz labouret gant sant Joseph var he vicher a galvez, e **Nazareth**.

Petra hen deuz great Jesus-Krist en tri bloaz diveza euz he vuez ?

7. En tri bloaz diveza euz he vuez, Jesus-Krist hen deus prezeget an Aviel ha great miraklou braz.

Penaoz eo maro Jesus-Krist ?

8. Lakeat eo bet d'ar maro gant he enebourien ha staget ouz **eur groaz**, da zeiz Guener ar Groaz, e **Jerusalem**.

Ha chomet eo Jesus-Krist er bez goude he varo ?


9. D'an trede deiz goude he varo, d'ar **Zul Fask**, Jesus-Krist a zo savet euz ar bez leun a vuez.

Da beleac'h eo eat Jesus-Krist ?

10. Daou ugent dervez goude m'eo savet euz ar bez, d'ar **Iaou-Bask**, Jesus-Krist a zo pignet d'an Nenv.

Perak e lavaromp da Jesus-Krist : Hon Aotrou ?

11. Evit diskuez hon respet, hor c'harantez evitan.



SEIZVED KENTEL AR REDAMPSION

Perak eo deuet Jesus-Krist var an douar ?

1. Jesus-Krist a zo deuet var an douar evit lakat an dud var hent ar Baradoz.

Ha red oa da Jesus-Krist dont var an douar ?

2. Ma ne vije ket deuet Jesus-Krist var an douar, an dud ne vijent ket eat d'ar Baradoz.

Perak ne vije ket eat an dud d'ar Baradoz ?

3. An dud ne vijent ket eat d'ar Baradoz, abalamour m'o doa dizentet ouz Doue.

Perak e c'hell breman an dud mont d'ar Baradoz ?

4. An dud a c'hell mont d'ar Baradoz, abalamour Jesus-Krist hen deuz bet digant Doue ar pardon evito.

Penaoz hen deuz bet Jesus-Krist ar pardon evidomp ?

5. Jesus-Krist hen deuz bet ar pardon o vervel evidomp var ar Groaz.

Penaoz ec'h hanver ar pezh hen deuz great Jesus-Krist evidomp ?

6. Ar pezh hen deuz great Jesus-Krist o vervel evit an dud a hanver ar **Redampson**.

Petra eo mister ar Redampson ?

7. **Mister ar Redampson eo Jesus-Krist maro var ar Groaz evit hor prena.**

Petra zigas deomp da sonj euz mister ar Redampson ?

8. Sin ar Groas a zigas deomp da sonj euz mister ar Redampson.



EIZVED KENTEL

AR PEC'HED HAG AR FINVESIOU DIVEZA

Perak omp bet krouet gant Doue ?

1. Doue hen deuz hor c'hrouet evit he anaout, he garet, hag hon lakat eüruz gantan er Baradoz.

Evit beza eüruz er Baradoz, petra hon deuz da ober ?

2. Eüruz e vezimp er Baradoz ma sentomp var an douar ouz an Aotrou Doue.

Petra eo dizenti ouz Doue ?

3. Dizenti ouz Doue a zo ober eur **pec'hed**.

Pe seurt pec'hejou zo ?

4. Bez e zeuz daou seurt pec'hejou : **pec'hejou marvel** ha **pec'hejou veniel**.

Petra eo ar pec'hed marvel ?

5. **Ar pec'hed marvel a zo eur guall dra benag great eneb lezen Doue.**

Perak e vez great pec'hed marvel anezan ?

6. Galvet eo pec'hed marvel, abalamour e ro ar maro d'an ene.

Petra eo ar pec'hed veniel ?

7. Ar pec'hed veniel n'eo ket ker gwaz hag ar pec'hed marvel ; evelato eo eur c'hlenved evit an ene.



NAVED KENTEL

AR PEC'HED HAG AR FINVESIOU DIVEZA

(kendalc'h)

Petra c'hoarvez gant an hini a varv e stad a bec'hed marvel ?

1. An hini a varv gant eur pec'hed marvel ne za ket d'ar **Baradoz**.

Da beleac'h e za an hini a varv gant eur pec'hed marvel ?

2. An hini a varv gant eur pec'hed marvel a ia d'an **ifern**.

Petra eo an ifern ?

3. **An ifern a zo eul leac'h a boaniou hag ennan ar bec'herien a jommo da viken.**

Da beleac'h e za an hini a varv eb pec'hed marvel ?

4. An hini a varv eb pec'hed marvel, da lavaret eo e stad a c'hras, a ia d'ar Baradoz.

Petra eo ar Baradoz ?

5. **Ar Baradoz eo al leac'h ennan ar Zent eüruz da viken.**

Piou a varn an dud goude o maro ?


6. An Aotrou Doue eo a varn an dud goude o maro hag a gas anezo pe d'ar Baradoz pe d'an Ifern.

Ar re a varv eb pec'hed marvel, ha mont a reont var eñn d'ar Baradoz ?

7. Ar re a varv eb kaout pec'hed marvel ebet a dremen eur pennad amzer er Purkator ma n'o deuz ket great pini-jen awoalc'h evit o fec'hejou.

Petra eo ar Purkator ?

8. Ar Purkator a zo eul leac'h
a boaniou hag eno eneoù an dud
just a zo peurneteat araok mont
d'arBaradoz.



DEKVED KENTEL

AN ILIZ

*Petra hen deuz lezet Hor
Zalver Jesus - Krist
gant an dud p'eo pi-
gnet en Nenv ?*

1. Hor Zalver Jesus-Krist, p'eo pi-
gnet en Nenv, hen deuz lezet gant an
dud he **Iliz**.

Petra eo an Iliz ?

2. An Iliz eo famill vraz ar griste-
nien a gred e Jesus-Krist hag a zent
outan.

*Bez e zeuz unan benag
e penn an Iliz ?*

3. E penn an Iliz e zeuz eur mestr,
an Tad a famill.

*Piou a zo e penn an
Iliz ?*

4. An hini a zo e penn an Iliz eo an
Tad Santel ar Pab.

*Bez e zeuz mistri all
dindan ar Pab ?*

5. Dindan ar Pab e zeuz mistri all,
an **Eskibien**.

Petra ra an Eskibien ?

6. An Eskibien o deuz da daoler
evez peb hini var he eskopti, var eul
loden euz an Iliz.

*Piou zo dindan an Es-
kibien ?*


7. Dindan an Eskibien eman ar **Ve-
leien**.

Petra ra ar Veleien ?

8. Ar Veleien a zo karget da gelen
ar gristenien ha da rei dezo donezonou
an Aotrou Doue.

*Pere eo brassa donezo-
nou Doue ?*

9. Brassa donezonou Doue eo ar
Zakramanchou.



UNNEKVED KENTEL

AR VADIZIANT HAG AR CONFIRMASION

- | | |
|--|---|
| <i>Pehini eo ar c'henta euz ar Zakramanchou ?</i> | 1. Ar c'henta euz ar Zakramanchou eo ar Vadiziant . |
| <i>Petra ra ar Vadiziant ?</i> | 2. Gant ar Vadiziant eo goalc'het an ene diouz ar pec'hed orijinel. |
| <i>Petra deuomp da veza dre ar Vadiziant ?</i> | 3. Dre ar Vadiziant e teuomp da veza bugale da Zoue ha d'an Iliz. |
| <i>Ha red eo beza badezet ?</i> | 4. Red eo beza badezet; anez ar Vadiziant ne c'heller ket mont d'ar Baradoz. |
| <i>Penaoz ec'h hanver ar re zo bet badezet ?</i> | 5. Ar re zo bet badezet a zo hanvet kristenien . |
| <i>Hag awoalc'h eo reseo ar Vadiziant evit beza kristen parfet ?</i> | 6. Evit beza kristen parfet eo red ive reseo Sakramant ar Confirmation . |
| <i>Piou a ro Sakramant ar Confirmation ?</i> | 7. An Eskibien eo a ro Sakramant ar Confirmation. |



DAOUZEKVED KENTEL

SAKRAMANT AR BINIJEN

- | | |
|---|--|
| <i>Ha ne zeuz ket eur Zakramant hanvet ar Binijen ?</i> | 1. Bez e zeuz eur Zakramant hanvet ar Binijen . |
|---|--|

Petra ra Sakramant ar Binijen ?

2. Dre Zakramant ar Binijen e vez resevet ar pardoun euz ar pec'hejou.

Petra zo da ober evit kaout ar pardoun euz ar pec'hejou ?

3. Evit kaout ar pardoun euz ar pec'hejou e ranker o diskleria d'ar beleg, setu ar pezh a hanver **kovez** ar pec'hejou.

Ha kuzat a c'heller eur pec'hed benag ?

4. An hini a guzfe eur pec'hed marvel ebken n'hen divije ket ar pardoun euz he bec'hejou all hag a raffe ouspenn c'hoaz eur pec'hed marvel.

Hag awoalc'h eo kovez ar pec'hejou ?

5. N'eo ket awoalc'h kovez ar pec'hejou evit beza pardounet; red eo c'hoaz lavaret da Zoue e zeuz **keuz** dezo ha **prometti** chom eb kuez enno.

Peur e resever Sakramant ar Binijen ?

6. Sakramant ar Binijen a vez resevet pa ro ar beleg an absolven.

Petra eo an absolven ?

7. An **absolven** eo ar pardoun euz ar pec'hejou.

Penaoz e c'hell ar beleg pardouni ?


8. Ar beleg a bardoun en hano Jesus-Krist hen deuz roet dezan ar c'halloud-se.

Petra zo da ober goude beza resevet an absolven ?

9. Goude beza resevet an absolven, e ranker c'hoaz **ober ar binijen** roet gant ar beleg.

Petra eo ar binijen-ze ?

10. Ar binijen roet gant ar beleg a zo eur beden da lavaret pe eun dra benag da ober evit an Aotrou Doue.



TRIZEKVED KENTEL

SAKRAMANT AN AOTER HAG AR GOMMUNION

Ha bez hen deuz c'hoaz ar bugel kristen Sakramanchou all da reseo ouspenn ar Binijen ?

1. Eur bugel kristen a rank reseo Sakramant an Aoter kerkent ha m'hen deuz an oad a skiant.

Petra eo reseo Sakramant an Aoter ?

2. Reseo Sakramant an Aoter a zo **kommunia**.

Piou a resever er Gommunion ?

3. Er gommunion e resever Hor Zalver Jesus-Krist er galoun.

Penaoz e c'heller reseo Hor Zalver Jesus-Krist ?

4. Reseo a c'heller Hor Zalver Jesus-Krist, abalamour e m'an kuzet e Sakramant an Aoter a zindan spesou eun tamik bara, hanvet an hosti sakr.

Bara ar Zakramant hag hen a zo ar memez bara hag ar bara all ?

5. Bara ar Zakramant n'eo ket ar memez bara hag ar bara all ; n'eo mui bara.

Perak bara ar Zakramant n'eo mui bara ?

6. N'eo mui bara, abalamour eo bet chenchet e korf Hor Zalver Jesus-Krist.

Penaoz e vez great ar jenchamant-se ?

7. Ar bara zo chenchet e korf Jesus-Krist gant ar beleg epad an **offeren**.

Neuze ta e resevomp e guirionez korf Jesus-Krist ?

8. Korf Jesus-Krist eo a resevomp e guirionez pa zeomp da gommunia.

Peur e ranker kommunia ?

9. Red eo kommunia da vihana da Bask bep bloaz ; ha c'hoant Hor Zalver eo e zaffenn aliessoc'h.

Ha chom a c'hell an ene eb kommunia ?

10. Ar c'horf ne c'hell ket chom eb drebi ; an ene ive ne c'hell ket chom eb kommunia.

Evit gellout kommunia petra zo red ?

11. Evit gellout kommunia eo red : da genta **beza neat a bec'hed marvel**, d'an eil beza **var iun**, da lavaret eo choumet eb drebi nag eva netra abaoue hanter-noz.



PEVARZEKVED KENTEL

AR ZAKRAMANCHOU ALL

Pere eo ar pevar Zakramant a dle peb kristen reseo ?

1. Peb kristen a dle reseo pevar Zakramant : ar Vadiziant, ar Gonfirmation, Sakramant an Aoter, Sakramant ar Binijen.

Eur bugel kristen ha reseo a c'hell Sakramanchou all ?

2. Eur bugel kristen, pa vez gual glany, a dle reseo evel an dud vraz Sakramant an **Nouen**.

Peseurt vad a ra Sakramant an Nouen ?

3. Sakramant an Nouen a ro nerz da ene ar re glany hag aliez zoken d'o c'horf.

Ha bez e zeuz Sakramanchou all ?

4. Bez e zeuz daou Sakramant all : an **Urz** hag ar **Briedelez**.

Petra eo an Urz ?

5. An **Urz** eo ar Zakramant a reseo ar re zo great beleien.

Petra eo ar Briedelez ?

6. Ar **Briedelez** eo ar Zakramant a ra priejou kristen.

Ped Sakramant zo ?

7. Bez e zeuz seiz Sakramant.

Pere eo ar seiz Zakramant ?

8. Ar seiz Zakramant eo : ar Vadian, ar Gonfirmasion, ar Binijen, Sakramant an Aoter, an Nouen, an Urz hag ar Briedelez.

Piou hen deuz roet deomp ar Zakramanchou ?

9. Hor Zalver Jesus-Krist eo hen deuz roet deomp an oll Zakramanchou.

Perak hen deuz Hor Zalver Jesus-Krist roet deomp ar Zakramanchou ?

10. Hor Zalver hen deuz roet deomp an oll Zakramanchou abalamour hen deuz hor c'haret ha c'hoanteat hor zikour da vont d'ar Baradoz.



PEMZEKVED KENTEL AR GRISTENIEN VAD

Henvel eo ar gristenien an eil ouz egile ?

1. Bez e zeuz kristenien vad ha kristenien fall.

Pere eo ar gristenien vad ?

2. Ar gristenien vad eo ar re a zent ouz gourc'hemennou Doue ha re an Iliz.

Ped gourc'hemen Doue zo ?

3. Dek gourc'hemen Doue zo.

Lavarit anezo.

4. (Pajen : 4, 5, 6.)

Bez e zeuz gourc'hemennou all ?

5. An Aotrou Doue a c'houlenn ive diganeomp senti ouz gourc'hemennou an Iliz.

Lavarit anezo.

6. (Pajen : 4, 5, 6.)

C'HUEZEKVED KENTEL

KARET AN AOTROU DOUE

Pehini eo ar c'henta euz an oll gourc'hemen-nou ?

1. Ar c'henta euz an oll gourc'hemen-nou eo karet Doue a greiz-kalon.

Penaoz e tiskuezer ar garantez evit an Aotrou Doue ?

2. Diskuez a r'er ar garantez evit an Aotrou Doue o senti outan hag o pedi anezan.

Petra eo pedi ?

3. **Pedi** a zo meuli Doue ha goulenn sikour digantan.

Pehano he deuz ar zikour-ze ?

4. Ar zikour-ze eo **gras** Doue.

Peur e tle eur c'hristen mad pedi ?

5. Eur c'hristen mad a dle pedi dreist oll diouz ar mintin ha diouz an noz, da zul ha d'ar goueliou.

Pere eo ar pedennou a dle eur bugel kristen lavaret bemdez ?

6. Ar pedennou a dle bemdez eur bugel kristen lavaret eo :

Sin ar Groas.

Hon Tad pehini zo en Nenv.

Me ho salud, Mari.

Me gred e Doue an Tad oll-c'halloudek.

An aktou a Feiz, a Esperanz, a Garantez.

Me govez ouz Doue oll-c'halloudek.

Gourc'hemen-nou Doue ha re an Iliz.

Eur bugel devot, ha ne lavar ket pedennou all c'hoaz ?


7. Eur bugel devot a zesk pedennou all hag o lavar aliez ; evelse, pedi ra araok ha goude he brejou, lavaret a ra he japeled..., etc...

Petra zo da ober d'ar zul ha d'ar goueliou ?

8. D'ar zul ha d'ar goueliou e ranker mont d'an **offeren**.

Penaoz e ranker klevet an offeren ?

9. Red eo klevet an offeren gant evez, respet ha devosion.



SEITEKVED KENTEL

KARET AN NESSA

Piou a rankomp c'hoaz da garet ervez lezen an Aotrou Doue ?

1. An Aotrou Doue a lavar deomp e rankomp karet hon nessa, da lavaret eo an dud all.

Piou a dleomp da garet da genta ?

2. Hor **c'herent** eo a dleomp da garet da genta.

*Piou a dleomp da garet
da c'houde ?*

3. Da c'houde e tleomp karet an
dud all.

Petra eo karet an nesa ?

4. Karet an nesa a zo ober vad d'an
oll ha droug da zen.

*Penaoz ober vad d'ar re
all ?*

5. Great e vez vad d'ar re all o sikour
anezo, o rei dezo ar pezh o deuz izom.

*Petra ra deomp ober
vad d'an nesa ?*

6. Ar vertuz a **garantez** eo a ra
deomp ober vad d'ar re all.

*An Aotrou Doue ha ka-
ret a ra ar garantez ?*

7. An Aotrou Doue a gar kement ar
garantez m'hen deuz lavaret e paéo ar
vad great d'an dud evel great dezan he-
unan.



KENTEL DIVEZA

RED EO DESKI AR RELIJION

*Gant ar pezh ho peuz des-
ket bete vremen ha
gouzout a rit ar reli-
jion abez ?*


1. Ar pezh hon deuz desket bete vre-
man ne zeo nemed eul loden euz ar
Relijion ; kalz traou all a jom c'hoaz
gant eur c'hristen da zeski.

*E pe leac'h e vez desket
an traou all ?*

2. Er **C'hatekiz** braz eo e vez des-
ket an traou-ze.

*Pegeit amzer e ranker
mont d'ar c'hatekiz ?*

3. Red eo mont d'ar skol gatekiz keit
amzer eget d'ar skol all, hag hirroc'h zo-
ken ma ne c'huezer ket mad ar relijion.



PENAOZ EN EM GEMER EVIT KOVEZ

I. — PETRA ZO DA OBER ARAOK MONT DA GOVEZ

Da genta. Pedit an Aotrou Doue.

Araok mont er gador-govez eo red sonjal e teuer da c'hou-
len ar pardoun euz ar pec'hejou hag e zeuz izom euz trugarez
an Aotrou Doue. Red eo, dre eur beden nerzuz, goulenn digant
an Aotrou Doue kaout truez ouzomp. Hag evit-se e c'heller lava-
ret : *Hon Tad, pehini zo en Nenv..., Me ho salud, Mari...* (Pajen 3.)

D'an eil. Sellet piz er goustianz.

P'e guir eo red anzañ hor pec'hejou, e rankomp o anaout.
Evit-se e rankomp o c'hask ha gulet ped guc'h omp bet
kuezet enno abaoe ar gofession diveza.

Eun dra vad a vo lenn ar pezh a zo aman var lerc'h :

(1) *Pec'hejou a eneb ar garantez a dleomp da Zoue.*

Choumet oun eb lavaret va fater diouz ar mintin ha diouz an noz ?

C'hoariet am euz en eur lavaret va fater ?

Mez am euz bet o tiskuez oan kristen ?

C'hoariet am euz en iliz ?

Choumet oun bet eb mont d'an offeren da zul ?

En em gavet oun re zivezad en offeren ?

Lavaret am euz guall gomzou a eneb an Aotrou Doue ?

Labouret am euz da zul ?

Drebet am euz kig d'an deizioù difennet ?

(2) *Pec'hejou a eneb ar garantez a dleomp d'an nesa.*

Dizentet am euz ouz va c'herent ? ouz va mistri ?

Manket am euz da gaout respet evito ? Lavaret am euz traou anezo ? Respountet fall dezo ?

Skoet am euz gant va breudeur, va c'hoarezed ?

Oc'h en em ganna oun bet ?

Diskuillet am euz eb izom ar pezh a rea ar re all ?

C'hoant am euz bet ec'h en em gaffe droug gant ar re all ?

Kemeret am euz ar pezh n'oa ket d'inn ?

Lavaret am euz geier ?

Didruez oun bet ouz ar re a ioa er boan ?

Jalouz oun bet ?

Plijadur am euz bet pa emgave droug gant ar re all ?

Douget am euz ar re all d'eur pec'hed braz benag ?

(3) *Pec'hejou all.*

Ourgouilluz oun bet ?

Karet am euz en em veuli ? tenna varnoun sellou an dud ?

Gourmand oun bet ?

Mouzet oun bet ?

Great am euz va fenn fall ?

Droug zo bet ennoun ?

Lezirek oun bet : da zevel euz va guele ?

— da zeski va c'hatekiz ?

— da labourat er skol ?

Sounjet am euz e traou fall, traou louz ?

Great am euz traou fall ?

Lavaret am euz komzou vil ?

Selaouet am euz gant plijadur traou louz ?

Lennet am euz pe sellet ouz levriou hag imachou fall ?

D'an trede. Ober eun Akt a Gontrision.

Goude beza sellet piz en ho koustianz, da lavaret eo great hoc'h examin, e rankoc'h lavaret d'an Aotrou Doue ho peuz keuz d'ho pec'hejou hag e fell deoc'h tec'hed diouto en amzer da zont.

Evit kaout keuz d'ho pec'hejou, e sonjoc'h :

1. En droug braz a c'hell en em gaout gant an hini hen deuz pec'het ; mont a c'hell d'ar Purkator ha zoken d'an Ifern ha koll evelse ar Baradoz.

2. Sonjit c'hoaz pegen dianaoudek eo ar pec'her e kenver Doue zo ker mad, hen deuz karet kement an dud m'eo maro evito var ar Groaz ; an Doue-ze ker mad eo a zo offanset dre ar pec'hed.

Goude beza sonjet en oll draou-ze eo eaz deoc'h kaout keuz d'ho pec'hejou ha prometti chom eb pec'hi en amzer da zont.

Neuze, a greiz ho kaloun, e lavaroc'h an Akt a Gontrision : *Va Doue, eur c'heuz braz am euz d'ho peza offanset.* (Pajen 7.)

Ha goude beza en em breparet evelse, n'ho peuz nemet mont da gaout ar beleg er gador-govez.

II. — PETRA ZO DA OBER PA ZEER ER GADOR-GOVEZ

Pa zeoc'h er gador-govez, grit sin ar Groaz ha lavarit :
Ho pennoz d'in, va Zad, abalamour am euz pec'het ; ha da c'houde : Me govez... beleg : dre va faot.

Lavarit neuze d'ar beleg abaoe peur n'hoc'h ket bet o kovez, ha resevet ho poa an absolven.

Da c'houde e rankoc'h diskleria ar pec'hejou ho peuz kavet en ho koustianz, en eur lavaret : *Va Zad, me am euz.....* (diskleria an oll pec'hejou).


P'ho peuz diskleriet ho pec'hejou, eb kuzat hini ebet, e lavaroc'h al loden diveza euz ar Gonfiteor : *Dre va faot, dre va faot.....*

Ar beleg, neuze, a gomzo deoc'h, a roio deoc'h aliou mad. Selaouit mad anezan ha dalc'hit sonj euz ar binijen roet deoc'h.

Da c'houde ar beleg a ro an *Absolven*, ha c'hui lavar a greiz kalon an *Akt a Gontrision*. Ho pec'hejou zo pardounet deoc'h. N'ho peuz nemed mont e peoc'h.

III. — PETRA ZO DA OBER GOUDE KOVEZ

Eat er meaz euz ar gador-govez, it da zaoulina en iliz. Trugarekait an Aotrou Doue euz ar pardoun ho peuz bet ha promettit a nevez ne fell deoc'h mui pec'hi. Grit ho pinijen. Da c'houde it d'ar gear, bezit fur ha ne zonjit mui en ho pec'hejou.



EVIT EN EM BREPARI DA KOMMUNIA

An deiz ma tleoc'h kommunia, kerkent ha ma zoc'h dihun e sonjit en dra vraz a reot bremaik.

En em viska deread a rit ive dre respet evit Hor Zalver Jesus-Krist.

Taolit evez mad da jom eb drebi nag eva netra araok kommunia.

Kommunia a c'hellit pe araok pe goude an offeren, mes guelloc'h eo kommunia epad an offeren.

ARAOK KOMMUNIA

Araok kommunia, en em breparit. Eun dra vad eo ober :

EUN AKT A FEIZ. *Va Doue, me gred e m'aoc'h aze er zakramant hag e zan d'ho reseo.*

EUN AKT A GARANTEZ. *Va Doue, me ho kar a greiz va c'houloun ; c'hui a gar ac'hanon beteg disken ennoun. Me garfe ho karet kement ha m'eo dleet.*

EUN AKT A HUMILITE. *Va Doue, n'oun ket din d'ho reseo, mes lavarit varnon eur ger a drugarez ha va ene a vezo e stad vad evit ho reseo.*

PA ZER DA GOMMUNIA

Epad ma vez lavaret ar *Gonfiteor* gant an hini zo o respount an offeren, e c'hellit ive lavaret ar *Gonfiteor*. Grit sin ar Groaz pa zistro ar beleg da lavaret *Indulgenciam*.

Ar beleg troet varzu ar re a dle kommunia, an hosti sakr gantan en he zourn, a lavar teir gueich : « *Domine, non sum dignus...* » *Va Doue, n'oun ket din e teuffac'h em zi, mes lavarit eur ger ebken ha va ene a vezo pareet.*

Netra guelloc'h evit en em brepari da gommunia eget lavaret ar geriou-ze gant ar beleg, o skei bep tro var ho peultrin.

P'eo deuet ho tro da reseo an hosti sakr, daoulinet ouz an daol zantel e lakit ar splend (lienen-daol) var ho taouarn. Ar beleg a ginnig deoc'h an hosti sakr ; dalc'hit soun ho penn, ho taoulagad hanter-zarret ; digorit mad ho kinou, astennit ho teod var ho muzel izella, ha kerkent ha ma zoc'h kommunit, lakit gant ho teod an hosti sakr da zisken en ho stomok.

Mes na vezit ket ankeniet gant an doare da gommunia. Sonjit dreist peb tra en dra vraz a rit, en Aotrou Doue a zisken en ho kaloun, a deu d'en em unani ganeoc'h. O tistrei d'ho plas, kendalc'hit da zonzal e Doue.

GOUDE KOMMUNIA

Eo red trugarekaat Hor Zalver Jesus-Krist.

Distro d'ho plas, chomit sioul, ne zonzit nemed en eun dra : en Aotrou Doue diskennet en ho kaloun. Grit guella ma c'helloc'h evit komz outan, evit lavaret dezan ar joa ho peuz,

hoc'h anaoudegez vad, ho karantez. Goulennit ive an oll gras-sou ho peuz izom.

Pa ne gavit mui en ho spered netra da lavaret d'an Aotrou Doue, kemerit eul leor ha lennit an *Aktou* goude ar gommunion.

Aliez, abalamour d'eur gouel braz, d'eun devosion benag, e c'helloc'h, o kommunia, gounid eun **indulgans plenier**. Arabat chom eb gounid an indulgans-se, rak he c'hinnig a c'heller evit eneo ar Purkator, ene eun tad, eur vam, eur mignoun, etc.

Evit gounid an indulgansou-ze, ne zeuz nemed kaout c'hoant d'o gounid ha lavaret, goude kommunia, 5 *Pater* ha 5 *Ave Maria* evit intansionou an Tad Santel ar Pab.

Bep tro ma zeer da gommunia e vez gellet gounid eun indulgans plenier o lavaret 5 *Pater* ha 5 *Ave Maria* goude ar bedenman great a zirak imach Hor Zalver stag ouz ar Groaz.



« *Setu me, o Jesus ken dous ha ker mad, dirazoc'h daoulinet. Gant oll nerz va ene e pedan hag ec'h aspedan ac'hanoc'h da lakaat da virvi em c'haloun ar feiz, an esperanz, ar garantez, eur guir glac'har d'am fec'hejou hag eur c'hoant stard d'en em barea diouto ; gant ar brassa karantez ha glac'har e troan va daoulagad da zellet ouz ho pemp gouli, o sonjal a spered er c'homzou a lavare guechall evidoc'h ar Profet David : « Treuzet » o deuz d'in va daouarn ha va zreid, kountet o deuz va » oll eskern. »*

TAOLEN

	Pajen.
Klevit mad.....	2
Peden ar bugel kristen.....	3
Pedennou stag outo induljansou.....	8
Petra ra ar bugel devot : Pa zihun, — Araok ar pred, — Goude ar pred, — Araok al labour, — Araok mont da gousket.....	9
Kenta kentel : Doue.....	10
Eil kentel : An Dreinded Sakr.....	12
Trede kentel : Krouadurien Doue.....	13
Pederved kentel : Krouadurien Doue (kendalc'h).....	14
Pemved kentel : Jesus-Krist.....	15
C'houec'hved kentel : Buez Jesus-Krist.....	17
Seizved kentel : Ar Redampson.....	18
Eizved kentel : Ar pec'hed hag ar finvesiou diveza.....	20
Naved kentel : Ar pec'hed hag ar finvesiou diveza (kendalc'h).....	21
Dekved kentel : An Iliz.....	22
Unnekved kentel : Ar Vadiziant hag ar Gonfirmasion.....	24
Daouzekved kentel : Sakramant ar Binijen.....	24
Trizekved kentel : Sakramant an Aoter hag ar Gommunion.....	26
Pevarzekved kentel : Ar Zakramanchou all.....	27
Pemzekved kentel : Ar Gristenien vad.....	29
C'huezekved kentel : Karet an Aotrou Doue.....	30
Seitekved kentel : Karet an nessa.....	31
Kentel diveza : Red eo deski ar Relijion.....	31
Penaoz en em gemer evit koveza.....	33
Evit en em brepari da gommunia.....	37